



CHANSON NEVEZ

VAR SUJET DAOU ZEN YAOUANC

PERE EN EM GARIE GANT FIDELITE.

Var un ton nevez.

A Bailard, Horaç, Tibul, Catul, Ovid, Orphe,
C'houi, modelou sincer deus ar güir amitie,
Laqit oll em guenou ho preposiou charmant,
Inspirat em speret va c'halon languissant.

Me ya da zisclêria va buez maleürus :
Tostait d'e c'hlêvet, tud yaouanc curius ;
Deut oll da bartaji va glac'har, va c'hlê mou,
Ha formit ganén-me eur feuteun a zaëlou.

En escopti Treguer e voa eur plac'h charmant,
Hac e d'oa ravisset calon meur a zen yaouanc :
Demeus an oll-meñc'hed a meus darempredet,
Hi eo, dre breferañç dreist oll, a meus caret.

Mes he zellou qen douç, hac he c'homzou deread,
He furnez, he douçder, hac e bolontez vad,
A ellumas em c'halon flammou an amouroustet ;
Bep instant va speret voa ganti occupet.

Var fovennou yaouanc, gant beg eur ganivet,
Tro-var-dro hon hano lies a meus scrifet.
C'houi, plantennou eürus, a gresco nos ha de ;
Ni garfe, èveldoc'h, e cresqfe hon amitie.

Ne meus mui a blijadur nemeñ arru e vez

An deiz d'allout güelet objët va c'harantez :
 Ennàn ma residanç dezir va fantazi,
 A guement z'or bed-mâ ne garan nemet-hi.

Mes, allas! torret eo chaden ar blijadur;
 Tròet va flanneden en flemmou dinatur;
 Brêmàn a dra certen vezo ret e c'huittât!
 Mancout ra va c'halon, sclerder d'am daoulagad.

Doue oll-buissant! roit din asistanç,
 Vit m'ellin d'am mestrez mont d'annonç ar setanç;
 Me a ya c'hoas ur vech bete ty va mestrez,
 Gant eur galon carguet, leun a dristidiguez.

Cetu me vis-à-vis d'am güir muia-carez,
 Princes an amitie, model an oll merc'het,
 Va oll gontantamant, oll joa deus va speret,
 Hi a garg va c'halon bep heur ha bep momet.

Neus netra en dro din na repret d'am memor;
 An amitie fidel a zo dreist peb seurt tenzor;
 Mes brêmâ e redoubl oll glac'har va speret :
 N'ellàn qet comz outi, qement e zòn mantret.

Abondanç va daëlou a deu d'am daoulagad;
 Carguet eo va c'halon demeus a huanad.
 Petra zo, va mignon, ma zoc'h qen desolet?
 Deus hoc'h affliction contit din ar sujet.

Qeus meus a greiz calon o velet ho tourmant;
 Me garfe ve'm pouvoar rêi dêc'h soulajamant.
 D'am annur, d'am glac'har c'houi a zo calz qiriec;
 Abars varc'hoas vintin me a vo partiet.

Possubl ve, va Doue, e ve güir qementse,
 E vec'h-u deut amàn vit qemer ho cònje!
 N'en deo nemet re vouir; partial a vo ret:
 Erru eo va c'herent da brononç va arrêt.

Arça, va zervicher, e zit-ta d'am c'huittât?
 Penos a rin brêmàn?... Houmâ zo calonad!

Va oll santimanchou zo ganêc'h gonezet :
Me a vo maleurus, ma vemp dispartiet.

Arrêtit ho taëlou, ... n'en em dezolit qet ;
Bars ur mis, d'ar pella, me deui c'hoas d'ho quëlet.
Qemerit confianç ha chommit en ho peoc'h ;
C'houi eo va oll esperanç : ne garàn nemedoc'h.

Allas ! va zervicher, n'en deo qet hep rêson
E velit-ho mestrez e qer bras affliction :
P'o po chenchet a vrô, c'houi chencho a lezen,
Eur vestrez all o po, c'houi'm dilezo a grenn.

Ha pa ve laget sur entrezomp-ni hon daou
Qement demus a hent vel zo ac'han d'an ênvou,
Credit en assuranç, bigen n'ho tilezàn :
Bigen mestrez n'am bo met an hini brêmàn.

Birvigen n'ancouezàn ar pezh a zo touët :
C'houi c'heus sonch, va mestrez, a voueliou Nedelec ;
Em boa aon em dilejac'h en deiz voa o tonet
An hini na zezire nemet bea ho pried.

Ha neuze, va mestrez, evit va c'honsoli,
Gant eun êr qer contant e teujoc'h da bropos din
Monet d'an ilis vras, eno, dirac Doue,
Da brononç ar sermant eus ar fidelite.

Etre peder ha pemp heur demeus an abardae,
En em rentjomp en illis an eil gant eguile.
Ha pa voemp-ni daoulinet vis-à-vis d'an auter,
E leqjot ho torn coant en hini ho servicher.

Gant eur güir galon sincer, en faç d'ar Sacramant,
E teujomp eno hon daou da brononç ar sermant.
D'en em garout fidel bete fin hor bue,
Bigen nemet ar maro sur n'hen dispartije.

Ha p'am be da veva qenlies a vlaves
Evel zo a zeillen ebar en en eur forest,
Birvigen n'ancouàn va doucic Jan-Yvon,

Plijadur va speret, rouanes va c'halon.

Eus a greiz va ene me offr d'éc'h, va mestrez,
Sacrific va speret ha va goad assambles :
Mar trahissàn bigen va oll bromessaou,
Doue d'am punisso a bep seurt maleuriou.

Qemerit, va mestrez, vit merq a bromesse,
Diou galon peur-treujet gant ar memes cleze;
Var ar memes imach e cavot dessinet
Diou durzunel yaouanc en em garrie parfet.

Ho comzou, va mignon, a zoulach va c'halon;
Ne allàn qet credi em lesfac'h en abandon :
Assurit d'in-me c'hoas, var ho qer a enor,
Bigen na drahissot eur galon d'éc'h digor.

Finissomp, va mignon, tost eo d'an anter-nos ;
Erru eo an amzer, poent è deomp repos.
Adieu, va mestrez qer, qen a vo ar c'hentàn
Ha d'éc'h, va servicher, mes retornit buan.

Aben pempzec de goude e retornis d'e güelet,
Gant calz demeus a joa, ne zanten qet qerzet ;
N'en qet buan avoalc'h, herves ma em boa c'hoant,
Me zante e lampe va c'halon triumfant.

Pa voan erru er plaç, en dezir va bolonte,
E qichen va mestrez evit clêvet he doare,
P'e c'honsideris ervat, e chommis estonet,
O tonet da gompren penos e voa chenchet.

Evit parlant dezi, hi na responte qet :
Eur flem sco em c'halon p'e güelis qer mantret,
An douar arouzet gant daëlou he daoulagad,
A voa un test assuret demeus he c'halonad.

Ah ! m'am c'harit-u c'hoas gant güir fidelite,
Disclêryit entrezomp brêmàn ar virione ;
Larit d'in ar sujet eus ho melanconi :
Güell eo ganén mervel eguet r'ei d'éc'h anvi.

Allas! va servicher, ni a vo separet :
 Da zemezi d'un all me a zo contraignet;
 Henvoas zo lavaret e vijen goulennet;
 Ze a zo qiriec dìn ma zòn qer glac'haret.

C'houi, Mari, va mestrez, am lèz en abandon,
 Goude ho peza laqet rouanez em c'halon!
 Honnes eo ar recompanç a meus-me meritet,
 Goude beza ho caret re dreist an oll merc'het.

Me ho ped, va mignou, na reprochit qet dìn
 E ve va dessin bremâ dont doc'h abandoni.
 Possubl ve'm accusfac'h a infidelite!
 Ne meus discuezet dèc'h nemet re garante.

Gout ouzoc'h coulz ha me peguelement ho caràn;
 C'houi zo caus d'am zourmant pini a anduràn :
 Va oll garante voa gonezet oll ganéc'h;
 Va brassa plijadur voa oboissa dèc'h.

Bepret on n'em rentet gant güir fidelite
 Bars en andret fixet herves ho polonte.
 M'am bije eveldoc'h nebeutoc'h carante,
 M'em bije ho quittèt hep nep difficile.

Me garje na vijemp bijen en em velet,
 Pa zeo ret demp hon daou bea dispartiet :
 Ma vije êru ar poent da veza demezet,
 Credit penaus bijen d'am zad n'am bije pleguet.

Goude ar blijadur e teu an desolation :
 N'ouffac'h mui eguedòn caout seurt affliction
 Eguet d'am separi eus dezir va c'halon,
 C'houi eo va zervicher, va oll gonsolation.

Ebars em flaneden na pebes chenchamant!
 Homàn zo evidòn eur voalen a dourmant!
 Va amzer dremenet am chagrin, va mestrez,
 Pa deu dìn da gompren bars em flijadurez.

Sonch oc'h eus a vis ebrel, ar zul goude creiz de,

E rojot din ar gach demeus hoc'h amitie :
 Nan, biscoas va speret ne voa bet qer joaüs ;
 Hanval voa hor boneur d'ar sperejou eürus.

Mes brêmâ ê mantret gant an oll dourmanchou.
 Me grede parfet mad e vijemp priejou :
 Un esperanç qen douç a rejouisse va c'halon ;
 Me zòuje na vije biqen separation.

Mes achu ê va boneur hac achu evit biqen ;
 N'en em dissipo qet evel ma ra'r glizen ,
 A zispâris en ær, pa deu an eol da zevel,
 Pe vel un dornad pell güintet gant an avel.

Petra a servich din bea laqet er bed-màn ?
 Bea da souffr evidoc'h, ô va mestrez, brêmàn ?
 Qen hir-ha va buez e pado va glac'har.
 Me garfe bea brêmàn e calon an douar.

Adieu a laràn dêc'h qent eguet partia ;
 Me a barlant ouzoc'h vit ar vech divea :
 Biqen bars er vrô-màn n'ho quèlàn, va mestrez :
 Bet eürussoc'h eguedòn.... Adieu evit james.

M'ho ped, va zervicher, ouzîn na fachit qet :
 Pa golfen va bue, me n'oc'h ancounain qet.
 Birviqen n'o quèlîn hep monet d'ho petec ;
 Gant calz a gonfiânç deut bepret d'am güelet.

Bet persuadet mad ho po consolation ;
 C'houi ê a meus choaset vit pried d'am c'halon.
 Credit en assurânç biqen n'ho tilezàn ;
 James mestrez n'am bo met an hini bremàn.

Ar silanç, ar glac'har ras fin d'hor preposiou ;
 Hor mouez a voa mouguet gant an huanadou ;
 Demeus va daoulagad e tirede daelou
 Vel ar voaziou o tiruill demeus ar meneziau.

N'ouffac'h biqen sônjal qer bras desolation !
 Me sônje voa plantet eur c'hleze em c'halon ;

Carguet a zizesper, ne c'houlén nemet ar c'hraç
Ar maro ar pronta, an termen va disgraç.

Me voa bet pemzec dez, ia, ha pemzec nos
Hep ma ellis biscoas qemer en tout repos :
Pa vijen em goele en dessin da gousqet,
Gant ar spont hac ar form e vijen difunet.

Bepret ar memes uvre a deue incontinant
Da represanti dîn an objet eus va zourmant
En etat m'e güelis, pa bartijomp hon daou,
Ar flem, an disesper bars en hor c'halonou.

Lies e receven deus e c'hêlou goude,
Dre voyen lizerou carguet a garante,
Pere am c'honsole epad va hir absanç,
O tont da jouissa eus a joa an esperanç.

Cetu dijâ nao mis na meus güelet va mestres :
Arru eo ganén lizer digant e c'honsortes.
O pebeus qêlou trist zo ebars annoncet!
A dal al lignen qenta e meus-én remerqet.

O planeden barbar, leun eus a velconi,
Ne scuisit-u qet c'hoas ous va fersecuti!
Pet güech e varvin-me qen mervel en effet?
E prouvi ho coler, ô petra meus-me grêt?

Den ingrat ha perfid, caled ha dinatur,
Maro eo da vestres bars en displijadur!
N'ellis pelloc'h poursu ar c'hêlou desolant,
Coll a ris ar güelet, an nerz, ar santimant.

Ne meus mui a c'hallout nemet evit goüela;
Echu ê va oll joayou, allas! var ar bed-mâ :
Ne meus evit partach da chom var an douar
Nemet hirvoud, tourmant, melconi ha glac'har.

O Roue an ênvou! Mestr an Æles eürus;
N'oc'h eus qet va c'hrouet vit bea maleürus.
Disqennit bete dîn sell lagad a drue,

Pe laqit prontamant eun termen d'am bue.

Ar spaç a drizec mis oun bet ous e henti;
 Ne voan em plijadur nemet pa vijen ganti :
 Hi a voa an objet eus va ambition;
 Qen ne ellàn cavet nemet affliction.

C'hoas e viràn em pres he lizer divea
 A scrifas-hi din-me gent quittât ar bed-mâ;
 Ha pa ven va-unan, lies en digoràn :
 Pa gommançàn d'e lenn, gant daelou er glebiàn.

Gouelomp oll, tud yaouanc, gouelomp oll assambles :
 Biscoas plac'h ne zeus bet fideloc'h eguet onnes ;
 Birvigen ne sortio certen eus va speret :
 Bete fin va bue me e c'haro bepret.

Canit-u, rossignol, gant ho mouez triomfant ;
 Disqueuzit d'ar c'hoajou hano va mestrez coant ;
 D'ar mintin, pa bignit etrezec an êvou,
 Vigilant ha fidel, repetit e hano.

Trist e qichen e bez e lacàn va c'harante ;
 Ennàn e repos brêmàn objet va amitie.
 Doue evit recompaç eus e c'harante fidel,
 En deus accordet dêi ar joayou eternal.

Ha pa deuyo an âncou gant e faç horrerus
 Da laqat un termen d'am bue maleürus,
 Deus ar memes moment ma vo va goad o repos,
 Me jouisso ganti euz joa ar Barados.

FIN.

E Montroulez, et ty LÉDAN, ru Pont-an-Itron-Varia.